

BRO GOZ VA ZADOU




Ni, Breiziz a galon, ka-romp hon gwir



Vro ! Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-




dro. Dis-pont 'kreiz ar bra-zel, hon za-dou ken



mad, A skui-lhas e-vit-i o gwad.

Moderato



DISKAN O Breiz ! Ma Bro, ma gar ma



Bro. Tra ma vo 'r mor vel mur 'n he



zro, Ra ve-zo di - ga-bestre ma Bro ! —



Ni, Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro ;
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro ;
DisPont 'kreiz ar brezel hon tadou ken mad
A skuilhas eviti o gwad.

DISKAN :

O Breiz, va Bro, me 'gar va Bro !
Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr va Bro !



Breiz, douar ar zent koz, douar ar varzed,
Neus bro all a garan kement 'barz ar bed ;
Peb menez, pep traouien d'am c'halon 'zo ker :
Enne 'kousk meur a Vreizad té.

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv,
N'eus pobl ken kalonek a-zindan an nenv ;
Gwerz trist, son dudius a ziwan eno,
O pegen kaer ec'h out, va Bro !

Mar deo bet trec'het Breiz e brezeliou bras,
He Yez a zo bepred ken beo ha biskoaz,
He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz ;
Dihunet out breman, va Breiz !

Henvoledigez dioc'h ar c'heumraeg gant TALDIR.

DOUE HA BREIZ BEPRÉD

KOUSK BREIZ-IZEL

An heol a zo ku - zet,
se - tu e - chu an de ;
Meglevarc'hloc'h o tin - tal an A - ve. Kousk,
kousk, Breiz I - zel bro dis - par, Se -
tu an noz o tont war an dou - ar. Kousk, Breiz
I - zel bro ker mad, Trouz ar mor bras a zav d'az
lus - kel - lat.

An heol a zo knuzet, setu echu an de :
Me 'glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

DISKAN :

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar,
Setu an noz o tont war an douar ;
Kousk, Breiz-Izel, bro ker mad,
Trouz ar mor bras a zav d'az luskellat.

C'houez-vad an ed e bleun hag allan alaouret
War ar mésiou gant ar gliz-noz a red.

Ar vesaerien a gan o testum o loened ;
Gwerziou Breiz-Izel n'int ket c'hoaz kollet.

En traouennou didrouz me 'glev kân an
[eostig] ;
Telenner noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz' o skedi an neny steredennet
A lar 'z eus eun Doue ouz hor c'haret..

An nep a c'houez bemdez a c'hounid e repoz,
D'an dud vad Doue en deus graet an noz.

Arvor, ô douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro all ker kaer n'eus ket war an douar.

J. MARÉGHAL.

Sav, Breiz-Izel !

T n keumraeg - « Gwyr Harlech ».

Sav, Breiz-Izel, da vannielou,
Ruziet gant gwad hon c'hendadou,
La - va - romp holl a-bouez hon penn
Breiz da vir - vi - ken.

Sav, Breiz-Izel, da vannielou
Ruziet gant gwad hon c'hendadou,
Lavaromp holl a-bouez hon penn
Breiz da virviken !

Dihun Breiz va Mamm venniget
Rag an deiz a zo digouezet,
Setu ar youc'h war bep kriben
Breiz da virviken !

Ar youc'h a zo aet 'dreuz d'an ér
Bete goueled hon lanneier,
'Dalek Gwened bete Porz-Gwen
Breiz da virviken !

Dic'houinet eo ar c'hlazeier,
Me 'glev lemma ar sabrinier,
Met 'us d'an trouz e klev an den
Breiz da virviken !

Mene-Bre ha Mene Kragou
O deus distonet hon galvou,
Gwagen ar mor 'lar d'ar wagen
Breiz da virviken !

Ar Vretoned a zo kaled,
Eus eur penn d'ar penn all d'ar bed
O deus touet difenn o gouenn :
Breiz da virviken !

Beteg ar gouelec'h ar pella
Ar c'horn a vrezel a vouda,
An avel youc'h en eur dremen
Breiz da virviken !

Ar c'halonou 'zo entanet
Hag an divrec'h a zo nerzet !
Doue, ro an Trec'h d'az mibien :
Breiz da virviken !

TALDIR.